

## G U E R Z

*Var sujet Yan Guilechin / Maharit Riou, e bried,  
ha Susanna Riou, o nizez, demeus a barros  
Plouguiel, assassinet gant Yan ha Lauranç  
Tregoad, deus ar memes parros.*

**M'**Ho ped a greis va c'halon, Jesus, Salver ar bed,  
Da r̄ei din gouir sclérijen da bos i va speret,  
Evit m'ellin discléria d'ar bobl en guirione  
Ar maleur so aruet n'en deus qet pell aboe.


En qichen Croas Kousy, evit henvel ar plaç,  
E zeo aruet ar maleur, pehini a zo bras :  
Yan Guilechin hat e bried en azy zo lazet ;  
Un nizez a voa gante, a benzec vloas oajet.

Unan a c'houlen digor da gaout tan da fumi,  
Yan Guilechin a dal an tan a deu da zigeri :  
Allas ! én na vouie qet, pa zigoras e zor,  
En devoa-hy digoret d'e vrassa adversour.

En compagnunes an de en deus gouleanet digor,  
Herves a zo artuet, e voa ar malfetour  
Pehini en devoa dessigna dre e dol yenjament  
Da laza an tri den-mà en eur mêmes instant.

Evel ma tigor an nor d'e enemiet btas,  
Er scojont quer maleturus ha mar eoe var ar plaç,  
Siouas, ar paour Yan Guilechin d'an douar hep appel,  
Ha sqeli a rejont are, ma neus ranget mervel.

E bried, Maharit Riou, a dosteas dese,  
Dre gomzou carantezus e c'houlenwas outa



2.

Ur pennadic a amzer d'en em gōuyertissa  
 Ous Jesus, hon Rédemptor, qent mont eus ar bed-mâ.

Ma elje n'em gōuyertissa eus a grëis e c'halon  
 Ous Jesus, hor c'houductor, ha gouir Roue an Tron,  
 Hac oüs ar Verc'hes Vari, Rouanes an Ælez,  
 Ma c'hantreo er joayou gōude fin e huez.

Unan eus an tyrañtet a lar d'an hini a scoe,  
 Na ehoujje qet da zelaou ar seurt résouliou-se ;  
 Pe e vanco an tol da ober, ha tûd a dremero,  
 A laqay hor c'hemeret, hac hör bomp ar maro.

Evel ma clèvas an tyrañtant ar den-mâ o prezeg,  
 He ziou vrec'h hac e venvec e scroches en deus savet :  
 Sqêy a ra qen maleurus varnei adreus he fenn,  
 Ma reuq coea d'an douar ous o zreid da vervet.

Cri a vije ar galon, ha cri ma na voelje,  
 A vije bet o clévet ar buguel voa gante  
 O c'boulen abalamour da Bassion Doue,  
 Ous an tyrañtet cruel humblamant he hue.

Goul a ra ous ar Verc'hes hac ous Doue pardon,  
 Hac ous an'dud miserabl e'e'houl compassion,  
 Respout a rejont dezi : heza po da vue  
 Qen onip bomp fin deus hommân e pezo a zele.

Homan co ar glac'har, comprenit, christenien,  
 E devoa ar buguel-mâ c'hoas o c'hortos mervel...  
 O velet lazà an daou den o veuzi en o goad,  
 Hep ma contante suri an tyrañtet ingrat.

Unan an dûd miserabl en deus dei prononcé  
 Laret hac hi a aneoia qen ma vije scdet  
 Ia, emei, m'ho heneo assur a dra certen,  
 Mes lezit va hœ ganén, n'ho tiscuillin biqen.

Evel ma clèvas an tyrañt anezio lavaret  
 Gerten oc'h anevezan, en deus-hv het scoet  
 Terri ra ur vrec'h dezi, hep caont compassion,  
 Sellit suri an tyrañt hac e oll ardisson.

## 3

Vel m'en deus-hi discaret e crog er forc'h houarn,  
 E sgêy var he senn treus-tre, qen e za d'an douar;  
 An uep n'antre en o mesq al lun var ar beure,  
 O deus laret dirazòn e voa gouir qementse.

Goude coll o buez, c'hoas an tyrantet cruel  
 Evit dont d'o massacri e crogjont er scabel,  
 Da vrixa o oll memprou, da zigerri o senn:  
 Emàn eo ar maleur incroyabl, christenien.

Cetu er niemes instant an tri den-mâ lazet:  
 Considerapla maleur, hep rôson na sujet!  
 N'ouffet qet disclêria brassoc'h crim na maleur,  
 Eguet a zo arruet er barros a Blouguiel.

Speret-Santel, deus an ên roit din sclêrijen  
 Da zisclêria qent finissa dirac ar gristenien  
 Piou a so qiriec d'an tri den hep sujet da vervel,  
 Penos eo recompanset an tyrantet cruel.

Disclêriomp ar recompanç o deus an enemiet  
 Demeus ar c'hrim detestabl o deus bet cometet,  
 E laza, e vassaci tri den nep sujet na rôson,  
 Receo a reont ar supliç abeurs Doueguirion.

Goerc'bes glorijs Vari, Man a gompassion,  
 Rouanes an oll Æles, roit din an ardisson  
 Da henvel dirac ar bobl an daou den miserabl  
 A zo bet cos d'ar maleur: Yan ha Laurang Tregoañ.

Pemzec dez int bet er guer goude grêt o dorset,  
 Gonêt e voant gant Satan har e oll gonsortet,  
 Hac a ro dé da gredi n'o dije nep scandal  
 Evit beza cometet us c'hrin qen disleal.

An drizcvet a vis meurs e zint bet qemeret,  
 Ha cunduet d'ar prison eguis crimalet;  
 Hac evel mac'h antrejont d'eo e voe presantet  
 An armou maleurus-mân pere ameus hanvet.

Goulennet e voe oute hac int o anafoa;  
 Hoc'h acqiesci teir guech na respontont netra.

4

**Jesu-Christ, hon Mestr divin, cablus en d' lege,**  
**Qen na ellent qet prezeg a esep gairione.**

Deiz marc'hat a Landreguer e zint bet partiet,  
 Conduet da Lannion eguis crimalet :  
 Hac o armou maleurus aroc d'eo pen-da-ben,  
 Ma crie an dud venjanç, o tonet da gomgren.

Pa antrejont er prison'e voent interrojet :  
 Laret d'eo e vurmure o farros a cnep ;  
 Cablus en em leqeent pa discoet diraze  
 An armou maleurus-màn e voant bet crog enne.

Condaonet voent da zouguen an daou venvec croel  
 Teir guech aben tri marc'hat d'ober an dro da guær,  
 O sonjal ober dezo en em gconvertissa,  
 Ha dont d'ansavi ar c'hrim e voant qiriec dezàn.

An aerouant furius a voa en o c'hichen,  
 Hac a rê d'eo da gredi e voant prest da vervel ;  
 En instant ha ma sonjent e vijent punisset,  
 Hac o tevel var ar c'hrim n'o dije drœug abel.

A Lannion da Voengamp e zint bet conduit,  
 Garottet gant ur chaden cri ha digar meurbet ;  
 Ha deus an eil qer d'eben, hete fin o bue ,  
 Evit henvel ar recompanç preparet evite.

An deirvet nos m'o devoa en Goengamp da possi ,  
 Ober a rejont concoar oa c'hout penos deserti :  
 Ma c'hallemp caout hon lanç, emezc, da dec'ties ;  
 Ec'h astensè hor bue, ne ranqémp qet c'hoas mervel.

Dre ur prenest e c'hejont en avis deserti ;  
 Prest e voent appercevet, ha ma savas ar c'hris :  
 Ar jolier, an archerrien o deus o arrêtet ,  
 Ha laqet en ur c'hachot, hac o daou houarnet.

A Voengamp da Sant-Brieuc e rancjont partia,  
 Elec'h m'o deus recevet o setanç diveza :  
 Unan anê so marvet, hac eguile so het  
 Tri mis anter var e lere'ls bep beza distrujet.

## 5

Abeō ar c'hoezecvet de deus a vis guengolo,  
Herves a incus ententet, e zeo laqet d'ar māz,  
Goerc'hes gloriis Vari, hon gouir avocades,  
Procurit dirac ho Mah evit ur pec'her qes.

Pa deuas deus ar prison da vonet da vèrvel,  
E voe goulennet outan gant e gordigerien.  
Qent ma vije delivret hac én disculje den :  
Netra n'en deus respontet, nemet plega e benn.

Pa voe èru var ar chaffot en e za è savet ;  
Truezus bras ous an ên en doveus het sellet :  
Juntri a eurc e zaouarn ha plega varneze,  
D'ar chaffot evit renta da Zouq e ene.

Jesus-Christ, me a c'houlen m'o devo recompaç,  
Goude ober pinijen en ên rejouissanc :  
Jesus, Salver adorabl, bezit truez oute,  
Ha placit-int, me ho ped, o semp en gloar an ên.

Esperi a ràn o dcus grêt calz-deus a binijen :  
Jesus, consolit qement en deus goeil blaneden ;  
Me a réqet m'o devo bet a gréis va c'halon  
Digant Dovc qent mervel ur gouir gontrition.

Ha m'o devo bet ar grac d'en em humilia  
Demeus a greis o c'halon qent mont ous ar bed-màn,  
Ous Jesus-Christ, bon Zalver, ous hor vain ar Verc'hes;  
Grac d'eo da veza en beat eus o zilvidiguez.

Selaouit, eos ha yaomanq, ha grit reflexion  
Var ar maleur-màn a dle antren en ho calon :  
En delivranç d'o ene leromp un *De profundis*,  
Ma plijo gant va Jesus beza oute truezus.

An nep a sell dezàn goat petra so qiriec  
D'ar maleur epouvantabl en Priel arruet,  
Abalamour d'eur pez douar a yê en ferm gante  
En deus grêt an dud maleurus dezi coll e bue.

Gouennomp digant Dovc goude fin hor kue  
Ar c'hraq d'en em aigvezout en joaujet au éa,

Evit ma c'hellomp assambles meuli hor gonir Autrou,  
Cana er gloar canticou caer ha meulodion.

Assambles gant an oll Zent ha gant an oll Æle,  
En honor d'hor c'conductor Jesus gonir Vab Doue,  
Ha d'ar Vere'hes gloriis , pini so deiz ha nos  
Oc'h intercedi evidomp ebars er barados.



## C A N T I C EN HÉNOR

**D'AN ITRON VARIA A VOUIR-SICOUR,**

**DEUS AR GUËER A VOENGAMP.**

Var ton nevez *Santecz Anna ar Palud.*

**D**I VAR pennou va daoulin mē e ya da c'houlen  
Digant ar Speret-Santel deus an ên sclêrigen  
De gomposi ur C'hantic herves ma santimant,  
En enor an Itron Varia Gouir-Siconr a Voengamp.

Me ho ped , pelerinet a bevar c'horn ar vro ,  
A Dreguer hac a Leon , a Voenet , a Guerneo ,  
Dent oll a greis ho calon da gaout ho Mam sanctel ,  
A receo ar pouvoariou a zaouarn hor Salver.

Ne zeus plac e Breis-Isel d'ar Verc'hes batisset  
Hac a ve darempredet gant ar belerinet ,  
Evel an Itron Varia a Gouir-Sicour a Voengamp ,  
Ar brillanta stereden a so er firmamant.

Beza e deus ar pouvoar digant Salver ar bed  
Da râi ar soulajamant d'an oll dud afflijet ,  
Qement en em'adresso dezi a vouir galon  
E laqay fin d'o zourmant ha d'o affliction.